



## KEMENNADENN COMMUNIQUÉ

Landerne/Landerneau 21.05.2021

### **Diwan enepbonreizhel !**

Mantret ha kounnaret eo izili ar rouedad Diwan war-lerc'h embannadur disoc'h seziz ar c'huzul vonreizh war al lezenn Molac. Daoust ma 'z omp kontant da c'houzout e vo dalc'het an divizoù a-fed ar skodenn skol omp sebezet diwar-benn an diviz war ar soubidigezh a nac'h ar bedagogiezh-mañ kenkoulz er skolioù publik hag er skolioù kevratet !

Ar pezh a dalv e vefe Diwan ha rouedadoù all ar skolioù kevredigezhel dre soubidigezh enepbonreizhel. Un distro 50 vloaz en a-dreñv...nac'hañ kevrateñ hor skolioù, nac'hañ ar skodenn skol, lemel postoù deskadurezh stad, setu an efedoù a c'hellfe c'hoarvezout gant ur soubidigezh enepbonreizhel.

Gant ar seziz-mañ lañset gant Blanquer en deus ar ministr digoret bras boest Pandore pa teu da vezañ Diwan hag ar rouedadoù dre soubidigezh er-maez lezenn hag en arvar an hentenn dre soubidigezh a reer ganti abaoe ouzhpenn 50 vloaz.

**Goulenn a reomp gant ar gouarnamant ha gant ar gannaded bezañ prest da sklaeraat stad an traoù, mod all ne c'hell ket Diwan mirout ouzh ar gounnar da sevel.**

C'hoant hon eus menegiñ al lusk kaer a zo bet krouet tro-dro d'ar yezhoù rannvro, gant ar strollad « Evit ma Vevo hor Yezhoù » hag « Unanet Evit ar Brezhoneg » ha kenderc'hel a raimp da vont war-raok gant nerzh, youl hag unvaniezh evit ma vo anavezet hor yezhoù ha hon hentenoù ha diwar-se kaout ar peadra da virout anezho.

**Gervel a reomp hor bugale, hon tud, an dud a-youl vat, hor skolaerien, hon implijidi nann gelennerien hag an dud tost o c'halon ouzh Diwan da zont d'an 29 a viz Mae da 1eur30 da Gwengamp evit saveteiñ hon hentenn lakaet mat en arvar ha mirout hor pinvidigezhioù boutin ma 'z eo ar brezhoneg hag ar yezhoù rannvro !**

**Betek an trec'h !**

## **Diwan anticonstitutionnel !**

Le réseau Diwan est effaré et en colère suite à la parution du résultat de la saisine du conseil constitutionnel sur la loi Molac. Bien que nous soyons soulagés par le maintien des dispositions concernant le forfait scolaire, nous sommes stupéfaits concernant la décision sur l'immersion qui non seulement interdit cette pédagogie dans le public, mais remet aussi en cause sa pratique dans les établissements sous contrat !

Conséquence directe, Diwan, et les autres réseaux d'écoles associatives en langues régionales, seraient anticonstitutionnelles. Retour plus de 50 ans en arrière...refus de contractualiser nos écoles, refus du forfait scolaire, retrait des postes éducation nationale, voici les conséquences que pourraient avoir une inconstitutionnalité de l'immersion.

En pilotant l'envoi de cette saisine, le ministre Blanquer a ouvert la boîte de pandore rendant Diwan et les réseaux immersifs illégaux et mettant à mal plus 50 ans d'utilisation de l'immersion.

**Nous demandons au gouvernement et aux députés de prendre leur responsabilité et de clarifier la situation, sans quoi Diwan ne pourrait plus répondre de rien !**

Nous tenons à souligner la belle dynamique qui s'est créée autour du sujet des langues régionales, avec les collectifs "Pour Que Vivent Nos Langues" et "Unanet Evit Ar Brezhoneg" et nous continuerons à oeuvrer avec force, vigueur et unité pour la reconnaissance de nos langues et de nos modèles, afin d'obtenir les moyens de les préserver.

**Nous appelons nos enfants, nos parents, nos bénévoles, nos enseignants, nos personnels non enseignants et nos sympathisants à nous rejoindre le 29 mai à 13h30 à Guingamp pour sauver notre modèle gravement attaqué afin de préserver nos richesses communes que sont le breton et les langues régionales !**

**Betek an trec'h !**